

CANAOUEN JOB-LUCH

Cabiten ar Brotestanted.

1.

Ar re goz o doa laret : ken ma vo fin ar bed,
E vo er falla douar e savo guella ed ;
Mes biscoaz n'o doa zonjet e teuje marmouzien
Da brezeg an Aviel etouez ar Gristenien.

2.

Ha couls goude pa zerrer ar Belek 'nhe iliz,
Pa zifenner er scoliou peden ha catechis,
Me a vel briz-otrone a goste Montroulez
O werza relijion en kear ha war ar mez.

3.

D'ar re-ma eo permettet ober ho ebestel
Ha displeg dirag ar bobl ar skrituriou santel ;
Judas hag ar franc-maçon a drid ouz ho c'hlevet :
Oll brezeguerien ar gaou a zo d'he consortet.

4.

Na neuz na foar na pardon lec'h n'o dije ho stall :
Levriou leun a c'hevier gant zeblant didamall,
Coz canaouennou dife carguet a loustroni
Mad da scuill en ineou pec'hed ha cazoni.

5.

An dour a red euz an teill n'hell ket beza dour pur,
Relijion calon vreïn zo c'hoaz muioc'h hudur ;
Hoguen hounez eo hini an oll Brotestantet,
Bet gant eur manac'h lubrik hag he sort invantet.

6.

Ar vro-ma a zo bet pell miret euz ar walen,
Rag hon zud coz, bennoz d'he ! oa fidel d'ho lezen ;
Mes cavet zo bet erlin war douar Breiz-Izel
Eun treitour mignon d'ar Zaoz ha memez he vével.

7.

- « Job-Luch, piou n'ije laret, pa eac'h dre an henchou,
- » Lost ho roched o ninzal er mez euz ho pragou,
- » E pije eun tok boul-hir, eur liviten danve,
- » Hag eur maner kaer da chom, gant groeg ha bugale ?

8.

- » Mad ! Me na n'oun ket zouzet ec'h oc'h deût pinvidik
- » Hag eun Otrou amzavet abeurs hon Republik :
- » Ebars ar fank awechou e caver an arc'hant,
- » Eno houi peuz hen zerret hep mez hag hep damant.

9.

- » *Arc'hant a vo, 'me ar Zaoz, arc'hant a villerou,*
- » *Mar caret renons d'ho pro ha da se ho Tadou,*
- » *Mar caret scuill a bep tu hon skridou brezonnec*
- » *Ha dreist-oll douguen ar bobl da zispriz ar Belek !*

10.

- » Ha houi, n'eun tol, a werzaz ha Franz hag ho Salver !!
- » 'Vid'hoc'h da yeva n'hon zouez, houi zo d'an Angleter !
- » Ha ma teuze d'he listri klask an tu-ma d'ar mor,
- » D'ho resev en porzou Breiz houi digorfe an nor !!!

11.

- » Ober d'imp-nt mont d'ho heuil ha cuitad hon c'hreden,
- » Eur c'hoz lakez evel d'hoc'h n'hen graje birviken ;
- » Mes eur loen vil bet er pri a sklabe an traou-all,
- » Evelse e ret an droug gant pri ho skueriou fall.

12.

- » Malevruz ar vugale a ea d'ho ti d'ar scol !
- » Er scol gant eun huguenod e ver zur d'en em goll.
- » Malevruz ar iaouankiz a chilaou ho comzou !
- « Euz eur zac'h a ampoëzon na zeu 'meid droug-louzou.

13.

- » Mes ar goassa droug eo c'hoaz ho skridou milliguet
- » Enep ar Werc'hez-Vari, hon mam muia caret,
- » Enep hon zakramanchou, enep hon beleien ;
- » Treitour, houi na gavet mad nemeid an dreitourien !

14.

- » Ma tigoue d'unan bennag a vinistred Jezuz
- » Kouezel euz he stad santel en eur vuhe mezuz,
- » Neuze c'het d'hen diarben gant eur ialc'had arc'hant :
- » Ar falla eo ar guella da veza Protestant.

15.

- » Daoust ha houi n'hoc'h ket henvel euz ar Pharizianed
- » Hanvet gant Jezuz gwechall gouën an amprevaned,
- » Pe beziou livet e guen war an tu diavez
- » Ha carguet en diabars a bep breinadurez ?

16.

- » Ia, houi zo d'an Angleter, calozaoz zo 'n ho kreiz,
- » Ha keun am he pa glevan en ho pek langa Breiz ;
- » Mes Bretoned all a zo, a drugare Doue,
- » Guel gant-he mervel mil guech evit renons d'ho fe. »

17.

O ma broik Breiz-Izel, fleuren an oll broiou,
Na neuz kaeroc'h evid'hoc'h nemeid bro an Envou ;
Ho hano beteg hirie a zo chomet divlam,
Hirie c'hoaz ho pugale a zifenko ho mam.

18.

Nan, nan, n'eo ket eun azen pevet gant ar Zaozon,
Nag eun neubed canfarted, scubadur ar c'hanton,
A rafe d'imp-ni trei kein da fe hon zadou coz
Ha coll evit eur biken hon lod er Baradoz.

19.

Mes poent eo ha tremen poent stouva kloz ho guennou
Da Job-Luch ha d'he vanden, gwerzerien blasphemou.
Deomp-ni oll d'ar foar guenta gant peb a wialen,
Ha deomp stard eun hinj d'ar poultr dindan ho liviten.

20.

Neuze welfomp o vresken ebestel an Ifern,
Ha gant ho faperiou louz ni a zavo eur bern :
An tantad a vo c'houezet war vene Comana
En enor da Sant Mikel ha da Santez Anna.

LOIZ PORS-YKEL.